


Melaris, bezit leun a joa,
Da gaout eur chapel ar gaëra;
Enni Mamm Doue, ar Werc'hez,
A gar diskuez he madelez.



1. Ya, er chapel-ma berniget,
A zo kement darempredet,
E Comfors, gwir Vamm Hor Zalver
A skuilh he grasou heb niver.
2. Eno biskoaz den na bedas
A greiz kalon, gant fizians vras
Anez boza beñ selaouet
Gant Rouanez an holl Eled.
3. Ar Vamm-ze ken mat, ken brudet,
Bepred he deus bet sikouret
An den just da berseveri
Hag ar pec'her da zistroi.
4. Obten a ra digant Doue
Yec'hed d'ar c'horf ha d'an ene;
Hag elec'h an dristidigez
E tigas laouenedigez.
5. Dre zorn Doue Holl Galloudek
D'ar re vut e ro ar prezeg,
D'ar re vouzar gless ar c'hleved,
Koulz ha d'ar re zall ar gweled.
6. An dud kam, an dud ma'haniet,
Goude beza Mari pedet,
A zistro leun a joa d'ar ger,
Heb kaout izom eus o bizier.
7. An Itron Varia Comfors,
A zigas dizanjer d'ar porz
Ar mortolod ken trubulhet
Dre ar mor rust pa renk kerzet.
8. Soudarded kristen Breiz-Izel,
E kreiz an tan eus ar brezel,
O deus bet santet alies
Pegen bras eo he madelez.
9. Rak-se pa zistroont d'o bro,
Goude m'int bet trec'h d'ar maro,
O gweler o tont a vanden,
Ha ganto peb a c'houlaouen.
10. Da drugarekât asambles
Mari, o madoberourez,
Da veza bet o diwallet
Pa oant e riskl beza lazet.
11. Ped gwech c'heaz n'he deus ket mouget
Mari, an tan gwall fuloret,
~~xxxxxxgwechxxxxxx~~
Ato Mari he deus remed
Ouz peb droug ha peb seurt klenved.
12. D'ar gebta sul a viz gouere,
Gant ar brasa solennite,
E vez gret ato ar Pardon
E Comfors gant devosion.
13. Daoulinet neuze dirazi,
Oh! pedomp a galon Mari,
Da gaout sonj ac'hanomp ato,
Dreist peb tra en heur hor maro.
14. Gwerc'hez Vari, hor Mamm dener,
Ni a zeu da dreid hoc'h aoter,
Evit pedi ho madelez
Da gaout ouzomp bepred truez.
15. Pa z'oc'h refti ar bec'herien,
Elijet ganeoc'h d'eomp-ni obten,
Digant Jezus, hor gwir Aotrou,
Pardon eus hon holl bec'hejou.
16. Epad ma vimp war an douar,
En draonien-man leun a c'hlae'har,
Grit ma vezimp d'ezan fidel,
Ha d'eoc'h ive, betek mervel.
16. O Itron Varia Comfors,
Hor renit war eñ d'ar porz
Eus an eürusted eternal
Da welet an Dreinded santel !